



## KANTIK

### Itroun Varia Roscudon



#### DISKAN

*Ni ho salud a greiz kalon  
Itroun Varia Roscudon  
Varnomp, Guerc'hez karantezus,  
Savit ho torn madelezus.*

#### I

Pell dious an drous en eur c'hoadig  
Evel eul labous e nezik  
Ho pugale o deus savet  
Ho skeudenn, Guerc'hez benniget.

#### II

Kan an eostik er bokedou  
Son dous ar gouerig prajou  
Goulaouen en ho chapelig  
Az zav deoc'h, Mari, eur c'hantik.

#### III

Keit ha ma skedint ar bleuniou  
Keit ha ma lintrint glazennou  
Er parkeier, Guerc'hez santel,  
Vec'h da biken Mamm Breiz-Izel.

#### IV

Kalounou trist ha glac'haret  
Gant Mari e vec'h kennerzet.  
Deuit holl da gaout ar Verc'hez  
E paeb seurt poaniou hag enkréz.

#### V

O Mamm dener ha truezus  
Evidomp holl pedit Jesus  
Guerc'hez sakr klevit hor pedenn  
Na zeuit d'hor dilezel biken.



IMPRIMATUR :

Quimper, le 30 Juillet 1935.

P. JONCOUR, vic. gén.